

Santel : Santel ! Santel ! Santel ! An Aotrou Doue, Mestr an ne hag an douar !

Lan eo get ho kloar an neañv hag an douar : **Hosanna e lein an ne !**

Ra vo benniget an hini a zeua e anv an Aotrou Doue : **Hosanna e lein an ne !**

Gorreoù : Ra vo meulet !

Hon Tad : hag a zo en neañv, hoc'h anv ra vo santelaet, Ho rouantelezh degaset deomp, Ho vennantez ra vo graet àr an douar 'vel an neañv. Roit deomp hiriv hor bara pemdeziek, Pardonit deomp hor pec'hedoù, 'vel ma pardonomp d'ar re o deus pec'hed doc'homp, Ha n'hon laosket ket da gouezh en tantasion, met hon diwallit doc'h an droug.

Ar beleg : Plijet geneoc'h, Aotrou Doue,... ha distro hor Salver Jezuz-Krist :

R/ : Rak deoc'h-C'hwi, Aotrou Doue, emañ ar Rouantelezh, ar gelloud hag ar gloar a-holl-viskoazh da virviken. Amen.

Lid ar peoc'h : *Ar beleg : Salver Jezuz-Krist... a-holl-viskoazh da virviken.*

Peoc'h hor Salver a vo bepred geneoc'h. R/ : Ha get ho spered !

Oan Doue : Oan Doue a lam pec'hedoù ar bed : **ho pet truez doc'homp ! (bis)**

Roit deomp ar peoc'h !

Kent ar gomunion : *Ar beleg : Setu Oan Doue, setu an Hini a lam pec'hed ar bed :*

Eürus ar re a zo galvet da bred santel an Oan. Man Doue, ned on ket din ma tait davedon, met lârit ur ger hepken hag e vo aesaet din.

Komunion : Meulomp holl leun a joa Madelezh an Aotrou Doue ! (2 wezh)

1 Geneomp, Aeled santel, meulit e garantez ;
Geneomp d'e largentez, kanit gloar eternel !

5 O deiz kaer hag eürus !
Torret en deus anfin

2 Pe tad en deus jamezget kement a druez
Sellet e vugale ha distanet o gloez ?

Hag aveit birviken
ma rañjennoù mezhus.

3 Bugul mat ha tener, redek a ra a-benn
Da glask e zañvadenn, d'he zenniñ a zañjer.

6 'Veit reiñ din koñfortañ
e-kreiz ma faouentez,

4 P'he gav get paot a boan, get pegement a joa
He samm àr e ziskoazh hag he doug d'ar vandenn

Eñ-mem dre garantez
a venn bout mam bevañs.

'Veit kloziñ an overenn : *An Aotrou Doue geneoc'h : R/ : Ha get ho spered !*

Doue hollgelloudek d'ho pennigiñ : An Tad, ar Mab hag ar Spered Santel. R/ : Amen !

Ar beleg : Kerzhit e peoc'h hor Salver, Alleluia : R/ : Bennozh da Zoue !

Kan-dibenn :

Rouanez an neañv, kemerit joe, Alleluia ! Alleluia ! A zo savet bev ag ar bez, Alleluia !

Rak ar frouezh ag ho tigostez Alleluia ! Alleluia ! Pedit 'vidomp an Aotrou Doue, Alleluia !

Deoc'h, Gwerc'hez, joe ha levenez, Alleluia ! Alleluia ! Jezuz'zo savet ag ar bez, Alleluia !



Perc'hinded ar Vrezhonegerion

2e sul Fask

12 a viz Imbril 2026

« Ar peoc'h ra vo geneoc'h ! »

E-tal ar feunteun : O Rouanez karet an Arvor,

O Mamm leun a druez

Àr an douar, àr ar mor,

Gouarnit ho pugale.

2 Ho kalon zo digor

'veit holl Ar Vretoned ;

an dud ag an Arvor

Ho kar ivez bepred.

1 Intron santez Anna,

Ni ho ped a galon :

Get joe ni 'n em laka

Dindan ho kouarnasion.

3 Patronez Breizh-izel,

Doc'hoc'h en deus rekour

Ho Arvoriz fidel,

Roit dezhe ho sekour.

Salud d'ar bobl : *Gras hor Salver Jezuz-Krist, karantez Doue an Tad*

hag unaniezh ar Spered Santel, ra vint geneoc'h-holl : Ha get ho spered !

Asperges: Alleluia !

1 Ha gwelet am eus an dour bev

É strinkañ a kalon ar C'hrist !

An holl re 'vo gwalc'het en dour-se

A vo salvet hag a gano :

2 Ha gwelet am eus ar vammenn

É tont da vout ur stêr divent !

Ha bugale Doue, holl tolpet

'Gane laouen da vout salvet :

3 Gwelet am eus ivez an Templ

Digor da virviken d'an holl

Ar C'hrist a zeua en-dro get trec'h,

A ziskouez gouli e gostez.

4 Gwelet am eus ivez ar Gomz

É reiñ deomp peoc'h hon Aotrou Doue.

An holl re a gred en e anv

A vo salvet, hag e kanint :

Lid-kerzh :

Alleluia ! Alleluia ! Alleluia !

1 D'ar sul vintin, da c'houlou deiz

An disiplid leun a dristez

A dostaas da welet ar bez.

2 Un Ael e gwenn, er bez chouket,

Dezhe o zeir en deus lâret :

Er Galile er c'havehet !

3 Sant Yehann a redas a-herr,

Ha fonnañploc'h 'veit sant Pier

Arrivase bez hor Salver.

4 Eürus ar re en deus kredet

Daousto ma n'o deus ket gwelet !

Eürus 'vint en neñv da vepred !

5 En deiz gouel-mañ get levenez

A vouezh uhel kanomp da Zoue

Gloar, meuleudi ha trugarez.

6 Lâromp get izelded-kalon,

Get karantez, get devosion :

Bennozh da Zoue ha melasion !

Gloria (Kêr Anna) : Gloria in excelsis Deo (2 wezh) ! In excelsis Deo !

Peoc'h àr an douar d'an dud karet getañ ; Ho meuliñ a reomp. Ho trugarekaat a reomp. Hoc'h adoriñ a reomp. Enor deoc'h a ganomp ha mil bennozh aveit ho kloar hep par. Aotrou Doue, Roue an neañv, Doue an Tad hollgellougek.

Aotrou, Mab unganet, Salver Jezuz. Aotrou ha Doue, Mab an Tad. C'hwi hag a lam pec'hed ar bed, ho pet truez doc'homp. C'hwi hag a lam pec'hed ar bed, degemerit hor pedenn. C'hwi hag a zo azezet en tu dehoù d'an Tad, ho pet truez doc'homp.

Rak C'hwi hepken a zo santel. C'hwi hepken a zo Mestr. C'hwi hepken a zo uhel-meurbet, Salver Jezuz, Get ar Spered Santel, e gloar Doue an Tad. Amen !

Lennadenn getañ : Lennadenn tennet a levr oberoù an Abostoled.

Fidel e veze ar vreuder da selaou kelennadurezh an apostoled, da viret ar gumuniezh, da gemer perzh e lid ar bara rannet hag er pedennoù. E pep eneañv e veze doujañs Doue, rak burzhudoù ha sinoù a veze graet get an apostoled. An holl re a grede a veve kevret hag o devoa pep tra kumun etreze. Gwerzhiñ a raent o rantoù hag o madoù hag ar priz anezhe a rannent etre an holl hervez doberioù pep unan. Fidel e vezent da vonet bemdez asamp d'an templ. Ranniñ a raent ar bara er gêr ha kemer a raent o fredoù e-kreiz al levezeg hag a wir-galon en ur veuliñ Doue ; ha grad-vat ar bobl a-bezh o devoa. An Aotrou a greske bemdez o strollad get an dud salvet.

Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !**

Psalm 117: Rentit d'an Aotrou gloar 'veit e vadelezh.

Ra lâro tiegezh Israel,
ya, da virviken e pad e drugarez.
Ra lâro tiegezh Aaron,
ya, da virviken e pad e drugarez.
Ra lâro ar re a zoug an Aotrou,
ya, da virviken e pad e drugarez.

Divountet on bet gete da gouezhiñ
Mes an Aotrou en deus ma harpet.
Ma nerzh ha ma gelloud eo an Aotrou
Ur Salver eo bet avelid
Youc'hadennoù a levezeg hag a drec'h
É teltennoù an dud reizh.

Ar maen bet taolet get ar saverion
a zo daet da vout maen-uhel ar c'horn ;
an Aotrou eo a reas an dra-se,
tra estlammus d'hon aoulagad.
Hemañ eo an deiz en deus graet an Aotrou :
tridomp ennañ get levezeg !

Eil lennadenn : Lennadenn tennet a lizher kentañ an Abostol sant Per.

Ma breuder, ra vo benniget Doue, Tad hon Aotrou Jezuz Krist, en deus hon lakaet en e garantez vras, da vout ganet a-nevez dre adsavedigezh Jezuz Krist a-vesk ar re varv, evit un esperañs a vuhez ; rak gortoz a reomp un heritag n'hell ket na breiniñ, na gweñviñ, na bout kousiet, an heritag miret en Neañv evidoc'h-c'hwi ar re diwallet dre ar feiz get gelloud Doue evit ar savedigezh a zegouezho da fin an amzerioù. Get ar soñj-se e tridit a levezeg en desped ma rankit, e-pad un herradig c'hoazh, gouzañv kalz a drubuilhoù. An aour kollidik a vez amprouvet dre an tan ; evel-se ivez ho feiz, hag a zo prisiusoc'h c'hoazh evit aour, a zle ivez bout amprouvet evit ma tay da vout talvoudus a-fet melasion, gloar hag enor pa en em ziskouezo Jezuz-Krist. Eñ hag a garit hep bout er gwelet, eñ hag a gredit ennañ hep er gwelet bremañ c'hoazh. Tridal a rit get ul levezeg bras-meurbet ha leun a c'hloar ken asuret ma oc'h bout gounidet savedigezh o enevioù evel priz ag ho feiz.

Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !**

Gwerz Pask

Aviel : An Aotrou Doue geneoc'h : **Ha get ho spered.**

Lennadenn ag an Aviel santel hervez St Yehann. **Gloar deoc'h-Chwi, ô Aotrou Krist !**

En amzer-hont, d'an deiz-se hag a oa deiz kentañ ar sizhun, d'enderv-noz, 'vel ma oa serret an dorioù ar lec'h ma oa tolpet an Apostoled get aon ag ar Yuzevion, daet Jezuz Jezuz en o c'hreiz hag e lâras dezhe : «Ar peoc'h ra vo geneoc'h !» Ha goude bout lâret an dra-se e tiskouezas dezhe e zaouam hag e gostez. Bras e oa levezeg an Apostoled é welet an Aotrou. Un eil gwezh e lâras dezhe : «Ar peoc'h ra vo geneoc'h ! Evel m'en deus an tad m'en daveet, evel-se ho tavean-me ivez». War-lec'h ar c'homzoù-se e c'hwezhas arne hag a lâras dezhe : «Resevit ar Spered Glan. Pardonet e vo o fec'hedoù d'ar re ma ho po int pardonet ha dalc'het e vint d'ar re ho po int dalc'het.» Met Tomaz anvet Didim (ar Gevell), unan ag an daouzek ne oa ket gete pa oa daet Jezuz. An Disiplad arall a lâras enta dezhañ : «Gwelet hon eus ar Mestr.» Met eñ a respontas : «Mar ne welan ket en e zaouam merch an tachoù, ha mar ne lakaan ket man dorn en e gostez ne gredin ket.» Eizh deiz war-lerc'h e oa c'hoazh an disiplad er mem lec'h, ha Tomas gete. Jézus e zeuastre, daousto ma oa serret an norioù, en em lakaas en o c'hreiz hag a lâras : «Ar peoc'h ra vo geneoc'h !» Ha goude e lâras da Domaz : «Lak da viz amañ, ha sell man daouarn, degas da zorn ha lak-eñ em c'hostez, ha ne vez mui diskredik, met den a feiz.» Ha Tomas da respont dezhañ ha da lâret : «Ma Aotrou ha man Doue.» Jezuz a lâras dezhañ : «Rak ma teus man gwelet Tomas e kredez. Eurus ar re n'o deus ket gwelet hag o deus kredet.» Jezuz a reas c'hoazh dirak e zisplad e-leizh a vuzhudoù arall ha n'int ket bet skrivet el levr-mañ. Met, ar re-mañ a zo bet skrivet evit ma kredehet emañ Jezuz Mab Doue ha ma ho po, é krediñ, ar vuhezen e anv.

Setu Komz an Aotrou : **Meuleudi deoc'h, o Aotrou Krist !**

Kredo : Credo in unum Deum. Patrem omnipotentem, factorem caeli et terrae, visibilium omnium et invisibilium. Et in unum Dominum Jesum Christum, Filium Dei unigenitum. Et ex Patre natum ante omnia saecula. Deum de Deo, Lumen de Lumine, Deum verum de Deo vero. Genitum non factum consubstantialem Patri, per quem omnia facta sunt. Qui propter nos homines et propter nostram salutem descendit de caelis. Et incarnatus est de Spiritu Sancto ex Maria Virgine, et HOMO FACTUS EST. Crucifixus etiam pro nobis sub Pontio Pilato, passus et sepultus est. Et resurrexit tertia die secundum scripturas. Et ascendit in caelum, sedet ad dexteram Patris. Et iterum venturus est cum gloria judicare vivos et mortuos, cujus regni non erit finis. Et in Spiritum Sanctum, Dominum et vivificantem, qui ex patre Filioque procedit. Qui cum Patre et Filio simul adoratur et conglorificatur, qui locutus est per prophetas. Et unam sanctam catholicam, et apostolicam Ecclesiam. Confiteor unum baptisma, in remissionem peccatorum. Et exspecto resurrectionem mortuorum. Et vitam venturi saeculi. Amen !

Pedenn hollvedel : Aotrou, hon Doue, ô Tad Santel, selaouiñ hor pedenn !

Lid ar profoù : ar beleg : Pedit, mam breudeur, ma plijo get Doue an Tad holl-gelloudek degemer ma sakrifis a zo ivez ho hani-c'hwi : **Plijet get Doue en degemer ag ho taouarn, aveit e c'hloar hag e veuleudi, aveit hor mad-ni hag hini an Iiz.**

Prefas : Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :

R/ : Ha get ho spered !

Ar beleg : Hor c'halon d'an uhel :

R/ : Emañ troet trema Doue !

Ar beleg : Trugarekaomp hon Aotrou Doue :

R/ : Just ha santel eo !